


DOUE HA BREIZ BEPRED



KOUSK BREIZ-IZEL




An heol a zo ku - zet, se - tu e - chu an




de ; Me glev ar c'hloc'h o tin - tal an A - ve. Kousk, kousk, Breiz



I-zel bro dis - par, se - tu an noz o tont war an dou - ar.



Kousk, Breiz I - zel, bro ker mad, Trouz ar mor bras a zav d'az



lus - kel - lat.

C'houez-vad an ed e bleun hag al lan alaouret
War ar mesiou gant ar gliz-noz a red.

Ar vesaerien a gân o testum o loened ;
Gwerziou Breiz-Izel n'int ket c'hoaz kollet.

En traoniennou didrous me glev kân an eostig ;
Telenner noz, sonit flour ha dousik.

'Us da Vreiz o skedi an nenv steredennet
A lar 'z eus eun Doue ouz hor c'haret.

An nep a c'houez bemdez a c'hounid e repoz,
D'an dud vad Doue en deus graet an noz.

Arvor, ô douar sakr, a greis kalon m'ho kar,
Bro all ker kaer n'eus ket war an douar.

(J. MARÉCHAL).